

K A N A O U E N N O U

Diverruz, diwoar-ben eur C'habiten a lonkour hag he ekipach oc'h erruout oar gwel ann douar a Breiz goudé eur veack hir.

Ar C'habiten kerkent a gomz oud-hé, hag a lavar ar c'homzo-man d'ar zegont, hac a gân var ton kabiten Ar Meur :

Erru zo arre eunn dez neve ;
Krog eo ar perroket da guoa ;
Admiomp sclérjen eunn Doue
Hô tont bemdez d'hon bizita.
O dev-z kaer a réjouissans !
Ma welinn ann ti paternel !
Erru hon oar gwel au douar Frans,
Prest da antren enn Breiz-lzel

Ma mignon zécond, bez dilijeant
Da évertissan ann ekipach,
Évit ma lakafomp hon batimant,
L'est da antren enn hon heritach
Anons dezho eo erra, an devez
Ma teu'o ho diou jod da wenan,
Ho pokat d'ho zud gant levenez
Ma choum ann avel er roud-man.

Apersev a reomp eur vrumen,
Hé sevel diwoar an douar,
Prest omp d'antren barz hon traouien,
Évit dizec'han ar glac'har
Zo 'barz kalonnou hon famil,
Ho welet hon retardamant ;
Mes hon beaeh a zo bet util,
Ze a raio dezho contantamant.

Pa'n deuz great peb hini he dever,
Arretomp aman oar ar pont ;
Admira rann gwelet ann amzer
Ho favorizan ac'hanomp.
Contamplomp ez ann er c'henta bro,
Enn andrejo omp bet ganet ;
Aze dre holl, mesk ar meneio,
Hé ma hon c'hérent mignonet.

Ma mignonet, me ro audians
Da bep hini da zisklérjan
Ann tenor deuez he connaisans ;
Ac'hann a c'helfomp ho fiks an.
M'hon devo enu tamm agreanant
Ho klevet hag ho kontampli
Ken a vézo erru hon batimant
En kaër Pempoul da réposi.

Ar Zegont

Cheto du-hont antre ar rivier
A gondou da gear Lanhuon,
Pa welan ez eo ziuol ann amzer,
Me a ia da gava eur chanson
'Vit ma clevo ma c'hoar Perrinan,
Gant ar mare a ielo ma mouez ;
Hi a zo en kouent Zantez-Annan,
Tri blaoz-zo pansionnerez,

Bez' em bo ar gonsolation,
Unan euz ann dezio nesar,
D'hé ambrasin gant joa eun em c'halon,
Eun parloer Zantez-Annan,
Ar c'himiad trist ar c'huanado
Hor boa great ouz em separin.
A raio zujet deuz hon joaio,
Pa c'halfom en em saludin.

Nin a oe manet hon daou minor,
'Barz ar bed, war lerc'h hon zud ;
Me a vale dre ar provinso,
Ha c'houi a vev eun solitud.
Sevomp hon peden war zu Doue ;
Me zo ho preur, c'houi zo ma c'hoar,
Ha gras d'imp d'en em gwelet eun dez,
Assamblez gant homp zud er gloar.

Ar C'habiten

Mar eo aze he ma da drouien,
Kont d'imp ann tenor euz da vro ;
Pelec'h aze he vezo ta loden,
Pa jousi euz ta vado ?
Alies oc'h euz dimp espliket
Penos he oa ar gaeran bro
Kanton Lanhuon, Perros-Guirec,
Trégaste a Pleumeur-Bodou.

Ar Zegont

Dezirout a ran kaout eun dachen
'Barz parouz Pleumeur-Bodou ;
Plas d'in ha d'am pevar damm planken,
Goude ann heur dimeuz ma maro,
Ma réposin enn mesk ma famil,
Ma c'herent ha ma mignonet
Bete m'a klevin ann drompil
A zono an eal da fin ar bed.

Ar C'habiten

Na gomz pelloc'h a dristidiguez.
En devez kaer hon euz c'harie :
Pelec'h a chom da vestrez,
Mar gweler he zi alèsé.
Diskoez d'in chiminal ha c'houent,
Ha me raio eur c'houlstéladen ;
Mar gallan me raio d'ézhi entend
E man he mignon o tremen.

Ar Zegont

Enn bord an oad, sellit eun draouien
A zo remplis euz a dud :
Eunn tamm huelloc'h, oar eun dosen
E man kouent ma c'harante ;
Enn houn-nez a zo eur fleuren kaer
Karet gant ann oll Vretoned,
An ftron Varia ar Sclerder,
Barz en parouz Perros Guirec.

'Barz amzer ma bugaleac'h,
Me oa gant furnez kéennet
Na razenn nep avantach,
Ho karout objedo ar bet.
Ha me a zerrize kaout eur vestrez,
Hag a deufé d'am azistan,
Hag am euz great anoudegez
Gant Mari, merc'h zantes Annan,

Enn-biam euz laket ma fians,
Ha hi respont d'am goulénno ;
Rei a ra din sicour hag assistans
Ebarz ar brasan dangerio,
N'eo ket' vel mestrezet ann amour,
Na glaskont nemert joausdet,
Pa vez ar brassa ezomm a zicour
Ez oc'h gant-he abandonnet.

R-t-e-ve d'oc'h beza bet er plas-ze
Da hanter eost evit kredi
Pegemen a dud a bep koste
A den da vizita he di
Ann ini vezo bet er blaoz man
E c'houlenn digant-hi eur mennat,
Da vloaz a retorno hep mankan
Adarre d'he zrugarekad,

Ia aze zo eur c'hontre kaer
Darempreded gant ar pobl breton
Da hanter eost o vont d'ar Sclerder,
Ha d'ar Pentecost da Zamzon.
Hen-nez zo ma brasa kamarad,
'Barz en parouz Pleumeur-Bodou,
D'an nep hen ped a ren zervich-mad
Hag assistanz enn he ezomou,

Pa oann bugel, enn Pleumeur-Bod
Me vije mintin mad savet
Évit mont da vord ar c'hroaz hinchou,
Da welet ar belerinet,
Pere a deu a bel evel a dost,
Da c'houlenn résistanz sant Zamson,
Dez a lun bask ar Pentekost.

M'am be iec'het a prosperite,
Pa vezo fin c'am c'hampagnou,
Me raio rezidans er vro ze,
Domicil en Pleumeur-Bbdou.
Ann abitantet euz a c'hontré
A zo tud humbl a généruz,
Tud a anave lezen Doue
Hag a gar he Vam da Jesus

Ken leger a ia hon batimant
Erru omp dirag rad Perros ;
Er plas-ze a menz bet contantamant,
Pa 'zeen da welet ma zad koz,
Eur breur dam zad a oa martolod,
A navige er c'habotach,
Hag ez eemp da vale gant he ganot,
Pa vije er gaer enn relach.

Pa zellan da gaout hourk Louannee,
Ez eo kontristet va c'halon ;
Er plas-zantel ze eo bet interret
Ma c'hulatur a ma faerron,
Ret eo d'in finisa ma chanson
Évit pedi gant ho ene :
Great eun all ann d'klarstion,
Ann nep zo oar wel he gontre.

Kanaouen ar c'hentan Martolot ho respont d'he Gabiten.

OAR AR MEMEUZ TON.

Ar C'habiten

Kenta, ma mignon ker,
Kontantet ma c'huriozite ;
Pa oc'h euz a ganton Landreger,
C'hui a lavaro din ar wirionez,
Eun pe sort andret euz ho kanton
Ma ann tour oc'hel a welan ;
Ne gred eo eun aplikasion
Da vartolodet a vro-man.

Ar c'hentan Martolot

Troat ann tour ze zo, 'vit lavaret,
Stokious mersi lo Landreger,
Ann iliz a zo bet diskaret
Aboc pel euz a anzer ;
Ann tour-ze a-seign, ma c'habiten,
Da gemer an dro ar rivier :
Ne gred ez eo douzet voar ho karten,
Rag hi hano zo brudet kaer

Gwechal parouz ar Minihy
E doa zant Mikel Evit Patron ;
Mes zant Ervoan deu da ektati,
Dre ma oa he parrouz gwirion ;
Ha pa boz lagat eur gour breton
Oar tour mein Zant-Mikel,
A teu da zont-d-zhan 'n he galon
Eus zant Ervoan eat Breiz-Izel.

Roit eun tam aplikasion,
Mes ret a vo dach seliet piz
Tour Landreger eun horizon ;
Chetu hi euz eun d'ann biz
Ann tourrion ze a diskoel fasil
Penez Landreger ma c'hontre
Zo bet h'abiter gant tud habil,
Hag a zelle etreze an ev.

Chetu aze eun iliz nevez
A zo eun parouz en Trévon,
A zo batisset gant tud a fe,
Evit ober ho fedennon,
Ouc'h-pen, me a well iliz Penvenan,
E-lec'h ouan bet batezet ;
Me 'meuz bet kalz a vizer a poan
Aboc ma c'hon diouti separet.

O iliz kaer chetu ho pugel
Erru d'ho gwelet eho bue ;
Bremen me gano a vouez c'huel :
Henor da Vreiz Izel ma c'hontre
Ama dre holl e mesk ar meneio
Zo batisset templo nevez.
Pere zo koustet kats a vadou,
Evit renti glear da Doue.

Sellit ! eun den enn tu man kavo,
'Vel ma poso he daoulagat
Oar douar ma bro, a welo
Eus dra beug a remerkabl.
Chetu du-hont tour Zant-Konéri,
Tour Plougoustant eo eguile ;
N'eo ket hep raison raun melodi
Kanton Landreger ma c'hontre.

Ma vije zentet euz ma c'homzo
Am c'hoant da rei da entent,
Lan treger glefe chench a hano,
H'bez e hanvet bro ar zent.
Tri zo bet kanoniset,
Hac eur zaotez bras er c'hanton ;
N'en denz hini anezhe merzeriet ;
Ze a ra henor d'ar vro breton.

E man zant Tual mignon Jesus
Kenta eskop eno Landreger ;
Ha ka z zo disk etiet evezuz,
Bet eskibien eun memez ker.
Ha Breiz Izel h'g he avokat,
A zo nat fenz ar Minihy ;
Zantez kounpara 'bors eun Langoat,
Eun Plougoustant, zant Konéri.

Kavet vé 'barz ar parrouzou
Ho relego dizouret,
D'bere ve great kalz a henoriou,
Ha gant ann holl in koret.
Tud bet eflu het en Breiz-Izel,
Pere a ziskleri franch mant,
Ho vizitan plassou zanel,
Ho deuz bet soutajmant.

Me na skonizan ket na mingonet.
Oc'h ober elajo ma bro ;
Mes hon batiment a ia bepret.
Pelec'h am euz bet agoudegez,
Pa oan iaon ink er guer,
Ha gant zik-uran holl va lelez
Esperan ho kwelet e-berr.

Finissa a raun ma brepozioù :
Ken a vo e ber tud ar c'hanton
Me a zezir j'ans ho kalamon.
Hag a kwelet kana ma chanson.
Nemert ma c'hon presel gant ar mare
Me 'mbije great c'hior'h ma ziskour,
Mes eun ad e gom euns adurre
Ha n'eo ket dach adversour.

Fin da ganaouen ar c'hentan Martolot

Kanaouen an eil Martolot.

OAR AR MEMEUZ TON.

Ar C'habiten

Erru omp dirag eur rivier
Hag ia breman barz eun douar,
Kalz pelloc'h evit kear Lan Ireger :
Eun den a zo amañ hag a oar.
Eil martolot, mar pe bolante,
C'houi a zisklerife penn da benn
Ann téor eameuz ar rivier-ze,
Hag euz ho kanton Roc'h-Derrien

An eil Martolot

Gleet ez eo d'in, pa gommandet,
Eksplika d'ach eun dra beug ;
Rag mar m'okann da ober ho souc'het
Veten eur servijer ingrat ;
Rag c'houi a so din a garante
Mar zo eur c'habiten lonkour ;
Vele eun tad mad 'vit he vugale.
Ne glesket nemert hon recour

Kasi 'vel eur bruzad a gavann,
Goude kement a danerio,
Erruout oar wel dar skinvier-man
Pere a gondun d'am bro.

Gant eur vag bihan da c'homona
Me a zo bet eiz euz d'oc'h-tu
Ho pesketa va zantik bara,
Aze e mesk ar lie'hid du

Galloud ha puisans eunn Doue
Neus gallet den bi-keas kompren ;
Digas rea ar mor diou vech bep dez,
Da gerc'hat hon zantik koken.
Pa retorne mor ann Osean,
Evit vizita hon c'hontre,
Ez eemp arre a-sambles gant han,
En em drugarekaat Doue.

Pa erruemp oar wel iliz Sant-Ervoan,
Hon c'habiten a rea sin a groaz.
Nonobstant d'hon miser ha d'hon poan,
Eun commun a leveremp graz ;
Goulen a reamp digant han bep mare,
Ar pe z a gevemp outa util :
Konservasion 'vit hon buez
Ha gahout da zouten hon famil.

Me wel breman dour an Osean
O vont da vizita ma bro,

Me garfe mont assemblez gant han,
Mes erruout a rian evit an dezo.

(Ho w let eur pesk a lavar dezan)
Peskik bihan, cheteo ma c'homzo :
Te a ia da antien er rivier,
Gra eur gomision evit-hon.
Me souc'het d'it chans a boneur

Neni dre dindan pont Landreger,
Hep kol kouraj, ha kerz pell c'h
Bete an dour dou, eun penn ar rivier,
A rancontri pont a Roc'h
Hag avons d'andud euz ar c'hanton
Penez a erru n'h p'aret,
Da vizita gant devozion
Ar chapel nevez ho deuz savet

An drivet zul viz gwengolo,
Me esper erruout er parton.
Kaeran chapel zo ebarz ar vro
Glevan zo zavet en em c'hanton.
Eun kaer ar Roc'h oar blasse ar C'halvar
Gawechat eur fort evit diven kaer,
Mes kreoc'h vit forcho au douar
Ez eo ar Werc'hez p'he veder

Gwerche'z pa oc'h bet aparisset
Da daou vogel ebars e montagn.
Vit kear ar Roc'h na cheunni kêt kuzet,
Nag euz bugale ar c'hampagn.
Ni grio war-oc'h c'h a vouez c'huel ;
M'ri, va vamm, roit eskort ;
Mar diroll ar mor hac an avel,
Sturiet hon baïmant d'ar bord.

bis

Ma c'hellion antrena enn ti ma zad,
Pehini a zo tost da vord an aot.
E ma an daeron enn he daontagad,
Pet zo ma oc'h ober kanv d'he betr ;
Mës e berr, pe war choaz ar beure,
Me hën sardo war ma c'halon.
Gant z'cour ar Werche'z ha grac Doue.
Me esper errouet enn em c'hanton.

bis

A pegen dous vezo d'in repos
Enn logit eur paour libouret !
Harpan ma venn, evit tremen an noz,
Oar eur penn euz Le oreiller !
Ma vije bet v' mamm enn bue,
Am bije brasoc'h plijadur ;
Oar ar pezerin dre bolute Doue,
Na dle nem oppoz nep krouadur.

bis

Ez ann d'ho annian, ma minioned,
Ret eo d'in lezel kement-zé,
K'iz a c'hanomp ho denz tud decedet,
Ri vezo Doue gant ho ene.
Pa velomb erru en hon c'hontre,
Ha pa eo bet mod hon beac'h,
Ni lakaio pedi evit hô ene,
Zi zo ar gwella avantach.

bis

Na c'hallan ket finis da barlant
Hep explik d'ec'h eun diskour,
Klevet gant eun den euz Pouldouran.
Am bea rankontret en estranjour,
A l'varas d'in gant eur air joüs,
Ha dre eur c'hanzo agreabl,
Oa batizet eun templ porzudus
Eun he baroz da zant Bergat.

bis

Pa démenfet, hé mé han, ma minonet,
Grêt dézhi eur vizit a skient,
Kaeran iliz a zo er bro breton
Hervé ar barouz hag hé ment ;
Lévirat d'habitantet Pouldouran
A vezo klevet ho elojo.
Tri mil leo euz ho bitisaman
Gant eur martolod euz ho bro.

bis

Cant enn dén en denz zicouret
Plasa eur men enn ho iliz.
Joa am euz da véza libouret
Evit mad eur kaer kër édilis.
Evit an neubendik am euz prestet,
Mé esper k'et in érest mad,
Béza gant Doue rékompanset
Dré proteksion zant Bergat.

bis

Chéto tout diskour ar merdead,
Pé hini n'denz ket a diéne
Vit béza roët da zant Berg d
Eun tamm euz hé c'honnidégez.
Konfians am euz bors enn Doué,
Pehini gundu baren ar stur,
Enn bea hag enn éteraité
Da gaout banheur ha pijadur.

bis

Habitantet kanton ar Roc'h-Derrien,
C'houbanet zot ar merdead ;
Mé zo a-uz ar mor oar eur planken,
Asténet ma diou vrec'h d'h k'ed,
Prest d'ho ambrosin dré gacané,
Ebarz eun jardin Bre z Izet,
E-léc'h am euz résevet ar vué,
E-léc'h a zéziran mervel

bis

Fin da ganaouen an eil martolod.

Kanaouen an Nevis ho respont d'ar C'habiten

Oar ar memez ton

Ar C'habiten

Eur c'his commun ho denz ar Vrétoned,
A-leka ma speret enn erreur ;
N'ouzon ket a bétéc'h eo di-k'nnet
A gir trist erel Doue Pleureur.
Ma mignon novis mé am euz esper,
Ha oc'h euz kanton Lézardré,
C'hisplik d'in, enn berr amzer,
A bétéc'h a zorti ar gir-zé.

bis

An Novis

Kabiten, n'em euz mann refusabl
Vit kontantin ho zantimant ;
Ar c'rist trist ar mian rémerkabl
Anaveet enn hon départamant.
A zo eun perouz Pleuveur-Gautier,
Dirac a gadar zarmen ;
A c'hané té di-ken ar gir zé.
Enn mesk ann habitantet breton.

bis

Erru omb dirag kanton Lézardré ;
Bivi a ra eun hon ma goad ;
O errouet war wel d'ann c'hontre,
Né denz nétra ken kous-labl.
Evel M'izès eun kreiz ar mor Ru,
Oar wél d'an douar promé-t,
Mé am euz espérans da gaout répu
'Barz ar c'hanton ma ouz ganet.

bis

Me a wel ar mélinou avel
O trei oar benn ar meneiou,
Hizon ar c'hapelou zantel.
Ar c'honinjeu 'barz eun traouienou,
Mouéz ar lipouet o frédoni
O anns an amzer névé.
D'uz kalonn teist da'n em konforti,
Ma zave da vouez 'trez'g an év.

bis

Mé wel c'hoaz, dré lagad ma speret,
Traou rémerkabl barz ma c'hanton ;
Luz Kerbarz névez batiset,
Ker 'vel gwechall temp Salomon ;
Ar gest 'barz eun ibz Trédarzek
A welaon c'hoaz o fleurissan,
Eun endret ar boeron ézomek
Ann intanvézet, ann dud klan.

bis

Kalonou miret ho vertu,
Crignet Doué zô kaution ;
Kaout raio pétra d'ho kundu,
Ha pa rafec'h ann alouzon.
Ornet kaër eo dré ho montagno
Ar Vaom a gundu d'ar bonheur,
Ha brodet bras, dré hé miraklo,
Ann Iron-Varia an Traou-Meur.

bis

P'am euz bet talent ar zonzéon.
E c'hallan transport ma spér d,
Da wel-t kroaz kaër ar mision,
En Planiel, oar ar véret.
Brétonet, teston ho madélez
A choom pel oar an douar,
Rondjou ho taolin, gant zantéiez
Gravet enn zijen ar c'halvar.

bis

Ann éko euz mouéz ar martolot
A ia bété douar Planiel,
Dré ar c'han éklatant zo eun aot,
Béé ti ar Verche'z santel
P'hini a den, gant he gouliou sacr,
Da dréchi maré ar suplis.
Pilot, a zicour ar merdead,
An Iron-Varia ar Goz-Ilis.

bis

Poursuivet ez ouan da fioisan ;
N'em euz ket ann amzer sulizant
Da réi eloj 'vel ma téziac,
Da Lézardre, kanton charmant.
S'iz parouz a zo barz ar c'hanton
Ha pévarzek oñ den pe oar dro,
Hô karout a rann holl em c'hanton.
Hag a riun bete ar maro.

bis

Fin da ganaouen an Novis

Kanaouen ar Mousik bihan o respont d'ar C'habiten. — Oar ar memez ton

Ar C'habiten

Gwel dalé a rit, ma mignonet,
Ebarz n'ho teklaration.
Ha c'hoaz na vezo ket d'in espliket
Ar pe'z zo enn em intansion.
Eun tour kaër a welaon eun douar ;
Ha den na gomz d'in anezhan :
Mousik bihan, mar ve eun ho pourvoar,
Espliket d'in pelec'h he man.

bis

Ar Mousik

Kabiten, ma a anave an teur-zé,
Me ia da espliqua d'ac'h raktal ;
Hennez zo eur léo euz k'ear Pontréo.
Ebarz ar barouz vraz a Bleuzal,
Hag an iliz a zo stok eut-han,
Zo dign a admiration.
Teir léo eun rond, hep en em dromplan,
A kléver ar c'hiéier o son.

bis

E omp o trémen penn ar rivier,
P'hini gundu da gear Pontréo,
Disparti entre gwelo ha Dreguer,
Uniset gant pont Lézardre.
Mé garfe nija 'vel eun alc'houéder,
Oar diou askel ma zonzou.
Da di ma zad, da barouz Quemper,
Ar braun euz ann holl parouzou.


bis

Evit ma c'halfenn, gant humilite,
En em brosterni oar ma daoulin,
Ebarz enn parouz charmant Zant-Kleve,
Dirag ar Werc'hez eun klerin,
Evit akomplisa ar bromesse
Am boa great da Vamm Jesus,
Pa oamp eun danjer hon bue,
Enn kreiz ar mor bras perillus.

bis

Mes brema me am euz esperans
D'akomplisa ma fromese,
Ha d'ho saludi gant reverans,
Habitantet kanton Pontre ;
Me a bok d'ho taouarn charitabl,
Maget hon gant hoc'h aluzon,
Ann daerou a gouez ma daoulagad
Ca d'in finisa ma chanson.

bis



Fin da ganaouen ar Mousik.

Kanaouen ar C'habiten

Oar ar memez ton

Me ho trugareka, ma mignonet,
Peb-unan enn particulier ;
Gwelet rann ez oc'h gwir Bretoned,
Hag obeisant enn em c'henver,
Poent eo d'imp gervel ar pilot,
Ma raio he breparation,
A-benn ma vezo erru gant he ganot,
Am bezo kavet eur chanson.

bis

Pa oamp du-ze 'barz ar broio all,
A renkemp veilla gant soursi,
Epad ann noz hag enn amzer deval,
N'hor boa netra d'ho anseini,
Nemert hon speret ha graz Doue,
Hag ar Rouanez puisant
He deuz prez rvet d'imp hon bue,
Ha soutenet hon batimant.

bis

Evuruz eo ar bro sivilizet,
Hag ar rouantelez kristen,
Aman peb tra a welomp reglet,
Dre urz ar prins hag al lezen.
Sellet pet batisamant util
A welomp deuz hon batimant ;
Darn zo batiset gant ar sivil,
Dar all gant ar gouarnamant.

bis

Ann tourien tan a welomp enn aot,
Ar balizo oar ar gerek,
A zo tout evit diskouez d'ar martolot
P'hini eo ann ben asuret ;
Ann telegraf evit kas ar c'helo
Mar omp gwelet enn danjer
Ann hini a gemer kement-ze a frejo
He doutans a gar hon bonheur.

bis

Chetu aze enezen Briat,
Konfians traouien Breiz-Izel,
Fortifikasion imprenabl,
Siuntinello a sitadel,
Tud ann douar ho deuz asurans,
Ar merdeat a wel he hent.
Buez hir d'ann Empalaer a Frans,
Konservasion d'he gerent.

bis

Sellomp an douar o fleurisa,
Hep mont a bel euz hon c'hontre,
Ar parouziou holl ho Vastisa
Tiez kaer ilizou nevez ;
Gant amzer vad ha trankilite,
Al labour ar gwenan o son
Ann Impalaer mignon da Zoue,
Ar bed enn he greasion.

bis

Kanton Pennoul, repu ar furnez,
Ho labour a verit memoar :
Me a bublio ho madelez
Dirag ann ev hag ann douar.
Komparajabl euz ann ebesterol,
Me vel ho kouraj aketus
Da orna ann ilizou z'ntel
Ha da enori kroaz Jesus.

bis

Me rent d'ac'h elo ha melodi,
Parouz Ivias ha Plourivo,
Plouec-ar-Mor, parouz Keriti ;
Doue gant justis ho baeo.
Ilizou kaer hoc'h euz bastiset,
Brudet e pevar c'horn ar vro :
Mes kaeroc'h eo eur plas preparet ;
Da eun ene mad 'barz enn envo.

bis

Parouz Plounez, patere Breiz Izel ;
Eon hoc'h e ma ar blanten roz ;
He grio zo enn ho iliz zantel,
Hag ar fleuren er baradoz ;
Konsolation ar beachour
Ebarz trubulio ar vue,
Ann Itron Varia Guir-Zikour
A ra miraklo bepred.

bis

Ma mignonet, erru eo ar pilot
Hon gunduo bete ar c'hae.
Mes petra welann enn bord ann aot ?
Sellet kaera chapel neve.
Batiset enn parouz Plaerauek,
Enn henor ann Dreindet zantel,
'Vit digemer ar belerinet
Euz a bevar c'horn Breiz-Izel.

bis

Doue en deuz akordet grasou
Abae pel amzer er plas-ze,
Da baeat ar rumatisejou
Dar re hen ped dre garante,
Nec'hall-mpket kaout gweloc'h konfians
Enn afliksion ar vue,
Ann Dreindet a zo hon esperans
Epad ann holl eternite.

bis

Ped den a fiks he devoision
Enn lech ma kav zikouriou mad,
Me am euz oblig sion
D'an Itron-Varia Kelo-Mad,
Mar anirean ann dez a c'hirie
Ebarz enu douar Breiz-Izel,
Eo eur mirakl a buissans Doue,
Ha Zikour ar Werc'hez zantel

bis

Bez em euz memoar ma ekipach,
Pa oamp barz ar mor kourousel,
Enn danjer da ober eun naufrach,
Am boa d'ar Werc'hez prometet,
Mar arifenn enn Pempoul gwelo,
E teulenn da drugarekat
Mestrez ann douar hag ann envo,
Ann Itron-Varia Kelo-Mad.

bis

En em gwskomp enn pelerinet
Rentet e m'omp enn bord ar c'hae,
Deomp holl assemblez d'he gwelet,
Pa omp retornet enn bue.
Me am euz ann hano a gabiten,
Mes Doue hep ken a gommand ;
Ar Werc'hez a zo hom streden
Sklerder ar bet antieramant.

bis

Ha pa hor bezo great hon devoision.
En em rentomp pep hini d'he vro.
Doue da rei he venediksion
Oar nomp holl bete 'r maro.
Ha ma a erruomp ken er bed-man
Er memez ambarkasion,
Me dezir ma c'helfomp da ganan,
Melodi d'hon Roue enn Sion.

bis

Ann Ekipach holl assemblez.

Dre hoc'h eo en em zervijet Doue
Da ober eur mirakl enn hon andret ;
Ho patimant, evel arc'h Noe,
Zo euz ann delnj prezervet.
Adieu d'ec'h kabiten venerabl,
Chanz e mor hag enn douar,
Hag an Itron-Varia Kelo-Mad
D'ho kunduo eun dez d'ar gloar.

bis

Fin da ganaouen ar C'habiten.

Ann ekipach-man en deuz dizkleriet beza
bet epad penzek devez o ruillat dre ar
mor, gant eur bar amzer fall, e-kreiz etre
daou dour, ha penoz mar int bet soveteet,
nannit nemert dre proteksion ar Werc'hez,
da behini oant en em adreset.

GREAT GANT PER RAISON.

Propriété de l'Éditeur.